

Chabistr kentañ

— Hag o sevel emamp en-dro ?
— N'emaomp ket ! En eneb ! O tiskenn emamp !
— Gwashoc'h eget se, Aotrou Cyrus ! O kouezhañ emamp !

— Dre anv Doue ! Dilastrit !

— Setu ar sac'h diwezhañ goullonderet !

— Hag o sevel emañ ar baloñs en-dro ?

— N'emañ ket !

— Klevet a ran evel gwag o saflikañ !

— Ar mor zo dindan ar c'havell !

— Ne dle ket bezañ pemp kant troatad diouzhomp !

Neuze e tispakas ur vouezh kreñv en aer, ha tregerniñ a reas ar gerioù-mañ :

— Stlapit kement a zo pounner !... pep tra ! Hag en avantur Doue !

Setu ar c'homzoù a dregerne en aer, a-us da ouelec'h dourioù ar Mor-Habask, e-tro peder eur d'abardaez, d'an 23 a viz Meurzh 1865.

N'eo bet ankouaet gant den moarvat ar barrad avel-viz spontus a zirollas e-kreiz kedez ar bloaz-se, ma kouezhas an aerbouezer da seizh kant dek milimetr. Ur gorventenn e voe hag a badas dizehan eus an 18 d'ar 26 a viz Meurzh.

Divent e voe an drast d'he heul en Amerika, en Europa, en Azia, war un takad ledan a driwec'h kant miltir, a-viez d'ar c'heheder, adalek ar pempvet ledredenn ha tregont betek an daou-ugentvet ledredenn su ! Kêrioù diskaret, koadegi diwriziennet, ribloù mor gwastet gant menezadoù dour a zeue da skeiñ evel bouc'hed, listri stlapet d'an aod, a voe kontet kantadoù anezho gant ar *Bureau-Véritas*, tiriadoù a-bezh kompezet gant torradoù glav a frike pep tra war o hent, tud a-viliadoù flastret war an douar ha lonket war vor : setu ar pezh a voe testeni he gounnar hag a vanas war-lerc'h ar gorventenn spouronus-se. Gwashoc'h e oa an drast ganti eget gant ar re a wastas La Habana hag ar Gwadeloup en un doare ken braouac'hus, an eil d'ar 25 a viz Here 1810 hag eben d'ar 26 a viz Gouere 1825.

Hogen d'ar c'houlz ma tegouezhe kement a wall-reuzioù, war zouar evel war vor, e oa ur gwallzarvoud, ken estlammus all, o c'hoarvezout en neñv strafuilhet.

Bez' e oa ur baloñs, douget evel ur voull e beg un trowent, ha tapet en ul lusk troidellek e-barzh ar bann aer, oc'h ergerzhout an egor gant un tizh a dek-ha-pevar-ugent milmor an eur, en ur dreiñ warnañ e-unan, evel pa vefe bet tapet en ur maelstrom aer.

Dindan stagadenn izelañ ar baloñs-se e oa ur c'havell o vrañsigellat, pemp treizhad ennañ, a-vec'h ma vez gwelet e-touez an aezhennoù fetis, mesket gant dour strinket, a rede betek gorre ar Meurvor.

Eus pelec'h e teue an aervag-se, gwir c'hoariell an taol-amzer spontus ? Eus pe boent eus ar bed e oa loc'het kuit ? N'he doa ket gallet mont kuit e-pad ar gorventenn, se zo splann. Hogen, abaoe pemp devezh end-eeun e oa ar gorventenn o ren, hag ar roudoù kentañ anezhi a oa c'hoarvezet d'an 18. Da grediñ e oa eta e teue ar baloñs eus

pell-pell rak n'en doa ket treizhet emichañs nebeutoc'h eget daou vil milmor bep peder eurvezh war-ugent ?

Bezet pe vezet ne oa bet e-ser an dreizhidi netra evit gallout jediñ an hent o doa graet abaoe ma oant loc'het, rak n'o doa tu ebet d'en em reteriñ. Souezhusat tra, goude ma oant kaset e-kreiz reuzioù ar gorventenn, n'o gouzañve ket. Dilec'hiañ a raent, treiñ a raent warne o-unan hep santout netra eus an troerezh-se, nag eus o dilec'h a-led. Ne c'halle ket o selloù treuziñ al latar fetis a grugelle dindan ar c'havell. Ne oa ken nemet brumenn tro-dro dezho. Ken divoull e oa ar c'houmoul zoken ken na vijent ket bet evit lavaret ha deiz pe noz e oa anezhi. Ne oa bet deuet nep dassked gouloù, nep trouz eus an douaroù annezet, nep blejadenn eus ar Meurvor betek enne el lec'h divent ha teñval-se, keit ha ma oant chomet en takadoù uhelañ. Gant o diskenn trumm hepken o doa meizet pegen bras e oa an arvar a-us d'an tonnoù.

Koulskoude e oa savet ar baloñs, dilastret eus traoù pounner, evel tennoù, armoù, pourvezioù, e gwiskadoù uhel an aergelc'h, da bevar mil pemp kant troatad uhelder. N'o doa ket termet an dreizhidi, goude bezañ merzet e oa ar mor dindan ar c'havell, ha pa soñje dezhe na oa ket ken bras arvar el lein eget en traoñ, da stlepel dreist al listenn an traoù talvoudusañ zoken ha klask a raent chom hep koll netra eus an heverenn-se, eus ene o aerlestr a oa ouzh o dougen a-us d'an islonk.

An noz a yeas e-kreiz trubuilhoù a vije bet marvel da eneoù gwanoc'h. Tarzhañ a reas an deiz adarre, ha, gant an deiz, e tiskouezas ar gorventenn mont war habaskaat. Kerkent ha deroù an devezh-se, d'ar 24 a viz Meurzh, e voe un nebeud siouladennoù. Da skleur an deiz e oa savet ar c'houmoul, c'hwezigennekoc'h, e lodennoù uhelañ

an oabl. En ur ober un nebeud eurvezhioù e tigoras an trowent hag e torras dezhañ. Tremen a reas an avel, eus korventenn da avel greñv, da lavaret eo ez eas div wech gorrekoc'h red gwiskadoù an aergelc'h. Bez' e oa c'hoazh ar pezh a ra ar vartoloded "un aezhenn tri riz", met ne voe ket bihanoc'h a se ar wellaenn e trubuilh an amzer.

E-tro unnek eur e hañvale lodenn izelañ an aer bezañ digailharet a-walc'h. Eus an aergelc'h e teue ar voullded c'hleb-se a vez gwelet, a vez santet zoken, goude tremen an ebrennoù meur. Ne seblante ket ar gorventenn bezañ aet pelloc'h d'ar c'hornôg. Hañvalout a rae bezañ en em zistrujet. Marteze e oa diveret e gwiskadoù tredan, goude torridigezh an trowent, evel ma c'hoarvez gwech ha gwech all gant kelc'hwidennoù Meurvor Indez.

E-tro an eur-se, avat, e c'hallfed bezañ merzet, adarre, e oa ar baloñs oc'h izelaat gorrek, en ur fiñvadenn ingal, e gwiskadoù izelañ an aer. Hañvalout a rae, zoken, e oa o tic'hwezhañ nebeut-ha-nebeut, hag o hiraat e oa ar golo anezhañ en ur zistennañ, o vont eus stumm ur voull da hini ur vi.

E-tro kreisteiz, ne blave ken an aervag nemet da zaou vil troatad a-us d'ar mor. Jaojañ a rae hanter-kant mil troatad diñs, hag, a-drugarez d'e endalc'h en doa gallet padout pell en aer evel-just, ha pa ve bet tizhet gantañ uhelderioù bras, pe ha pa ve aet diouzh ur roud a-blaen.

D'ar poent-se e skoas an dreizhidi an traezoù diwezhañ a bounnerae c'hoazh ar c'havell, an nebeud a voued o doa miret, pep tra, betek ar rikoù munut a oa e-barzh o godelloù, hag unan anezhe, hag a oa pignet war ar c'helc'h ma oa strollet kerdin ar rouedad, a glaskas eren start lodenn izelañ an aervag.

Anat e oa ne c'halle ket an dreizhidi delc'her ken ar

baloñs en takadoù uhel, hag e oa an aezhenn oc'h ober diouer dezhe !

Graet e oa o stal eta !

End-eeun, ne oa nag ur c'hevandir, nag un enezenn zoken, a c'hallent gwelet dindane. Ne ginnige an egor poent ebet evit douarañ, tachenn galet ebet m'en dije gallet o eor kregiñ enni.

Ar mor divent e oa, a skoe e donnoù an eil re war re all c'hoazh gant ur feulster dibar ! Ar Meurvor e oa diharz da welet, dezhe zoken, hag a oa a-us dezhañ hag a dape o selloù betek pevar-ugent miltir tro-dro ! Ur blaenenn zour e oa, pilet didrugar, foetet gant ar gorventenn, hag a dlee hañvalout dezhe bezañ ur marc'hadur bernioù-mor fuilh, a vefe bet taolet ur mell rouedad a gribennoù gwenn ! Tamm douar ebet war wel, na lestr ebet !

Ret e oa eta, gousto pe gousto, herzel an diskenn, evit mirout ouzh an aervag da ouelediñ e-touez an tonnoù. Hag a-zevri gant an dra vallus-se e poanie treizhidi ar c'havell. Daoust d'o strivoù avat e tiskenne dalc'hmat ar baloñs, tra ma oa o vont prim ha fonnus, diouzh roud an avel, da lavaret eo eus ar biz d'ar mervent.

Fallat plegenn hini ar re zroukchañsus-se ! N'o doa ket o zu ken, anat e oa, war an aervag. Ne c'halle ket o strivoù dont da benn vat. O tic'hwezhañ mui-ouzh-mui e oa golo ar baloñs. O vont kuit e oa an heverenn hep na ve an tu da virout outi. O vuanaat e oa an diskenn, ha, da un eur goude kreisteiz, ne oa a-istribilh ar c'havell nemet d'ar c'hwec'h kant troatad d'ar muiañ a-us d'ar Meurvor.

Ne oa ket posupl mirout ouzh fuadenn an aezhenn a oa o vont diharz dre ur rog el lestr.

En ur skañvaat ar c'havell diouzh kement tra a oa ennañ o doa gallet an dreizhidi chom da blavañ en aer un nebeud eurvezhioù ouzhpenn. Ne c'halle ar gwallzarvoud a oa da erruout nemet bezañ ampellet, ha, ma ne zeue nep tamm douar war wel a-raok an noz, treizhidi, kavell ha baloñs a yafe da get en tonnoù.

Graet e voe d'ar poent-se an embregad nemetañ a oa da ober. Tud startijenn gante e oa treizhidi an aervag anat eo, ha gouzout a raent sellet a-dal ouzh an Ankoù. Ne vije ket klevet an disterañ mouskomz o tont diouzh o genoù. Mennet e oant da stourm betek ar poent diwezhañ, da ober pep tra evit ampellat al lamm. Ne oa ar c'havell nemet ur seurt kased aozilh, dic'houest da neuñviñ, ha ne oa tu ebet d'e lakaat da chom war gorre an dour ma kouezhe.

Da ziv eur e oa an aervag a-vec'h pevar c'hant troatad a-us d'an tonnoù.

D'ar poent-se e voe klevet mouezh ur paotr – mouezh ur gwaz ha ne c'hall ket an aon tizhout e galon. D'ar vouezh-se e respontas mouezhioù all ken nerzhus all.

— Ha stlapet eo pep tra ?

— N'eo ket ! Dek mil lur aour a chom c'hoazh !

Kerkent e kouezhas ur sac'h pounner er mor.

— O sevel emañ ar baloñs ?

— Un tamm, ne vo ket pell a-raok kouezhañ adarre avat !

— Petra a chom da skeiñ er-maez ?

— Netra !

— Geus !... Ar c'havell !

— Krogomp er roued ! Hag ar c'havell d'ar mor !

Bez' e oa, end-eeun, an doare nemetañ ha diwezhañ da skañvaat an aervag. Troc'het e voe ar c'herdin a zalc'he

stag ar c'havell ouzh ar c'helc'h, hag a-benn ma kouezhas e savas an aervag a zaou vil troatad.

Pignet e oa ar pemp treizhad a-harzoù ouzh ar rouedad, a-us d'ar c'helc'h, hag o terc'hel o c'hrog e oant e roued ar melloù en ur sellet ouzh an islonk.

Ne ouzer ket pegen diasav eo an aervagoù. N'eus ken nemet stlepel an dra skañvañ evit o lakaat da sevel a-serzh. An ardivink, o nijal en aer, a wered evel ur ventel gant ur reizhder matematik. Kompren a reer eta e vez bras ha trumm e fiñv pa vez dilastret eus ur pouez pounner a-walc'h. Ar pezh a c'hoarvezas d'an degouezh-se.

Goude bezañ kavet he c'hempouez e-pad ur prantadig en takadoù uhelañ avat e krogas an aervag da ziskenn adarre.

Graet o doa an dreizhidi kement a c'hallent ober. Den n'en dije gallet o saveteiñ diwar neuze. N'o doa ken da gontañ nemet war sikour an Aotrou Doue.

Da beder eur e oa ar baloñs da bemp kant troatad a-us gorre an dour hepken.

Klevet e voe un harzhadenn greñv. Ur c'hi a ambrouge an dreizhidi hag e-kichen e vestr e oa o telc'her e grog e melloù ar roued.

— Top en deus gwelet un dra bennak ! a huchas unan eus an dreizhidi.

Kerkent goude e voe klevet ur vouezh kreñv :

— Douar ! Douar !

Ar baloñs, a oa kaset dalc'hmat etrezek ar mervent, en doa graet pellhent bras, abaoe skleur an deiz, kantadoù a vilmorioù, ha bez' e oa deuet war wel un douar uhel a-walc'h war an tu-se.

Da dregont milmor dindan an avel e oa an douar-

se c'hoazh avat. Un eurvezh hir a vefe ezhomm d'an nebeutañ evit e dizhout, ha c'hoazh gant ma ne vefent ket diroudet. Un eurvezh ! Ha ne vefe ket aet da hesk an holl heverenn en doa dalc'het ar baloñs a-raok ?

Aze e oa an dalc'h ! Gwelet a rae an dreizhidi ar poent kalet-se a oa da dizhout kousto pe gousto. Ne ouien ket petra e oa, enezenn pe kevandir, rak a-vec'h ma ouient e pe lodenn eus ar bed e oant bet kaset gant ar gorventenn ! An tamm douar-se avat, ha pa vefe annezet pe ne vefe ket, ha pa vefe degemerus pe ne vefe ket, ret e oa e dizhout !

Hogen da beder eur e oa anat ne oa ket ar baloñs evit delc'her da vont ken. A-rez an dour-mor e oa. Meur a wech dija o doa lipet kribennoù pezhioù bernioù-mor traoñ ar roued, ouzh he fonneraat c'hoazh, ha ne harpe ken an aervag nemet a-hanter, evel ul labous paket drajez gantañ en e askell.

Un hantereur diwezhatoc'h ne oa ken an douar nemet d'ur milmor, ar baloñs avat, faezh, dic'hwezhet, distenn, joget e melloù plegoù, ne oa banne aezhenn ken en e lodenn uhelañ. Re bounner e oa c'hoazh evitañ an dreizhidi krog er roued, hag e berr amzer, hanter soubet er mor, skoet e voe ar re-se gant ar bernioù-mor diroll. Neuze e reas an aervag sac'h goull, hag an avel-sil a vountas warnañ evel ul lestr avel a-du ganti. Marteze e tiraefze an aod evel-se !

Hogen, ne oa ken nemet un daou c'hant gourhed dioutañ, pa darzhas kriadennoù spontus eus pevar bruched war an dro. O paouez ober ul lamm dic'hortoz e oa ar baloñs, na ziskoueze ket dleout sevel ken, goude bezañ bet skoet gant ur pezh tarz-mor. Evel pa vefe bet dilastret a-drumm eus un darn eus e bouez e savas adarre d'ur mil pemp kant troatad uhelder, hag aze e kejas gant

ur seurt disvarr avel. Hemañ, e-lec'h e zougen war-eeun d'an aod, en kasas war un tu hogos kenstur. A-benn ar fin, daou vunut diwezhatoc'h, e tostaas dezhañ a-dreuz hag e kouezhas da vat war traezh ribl ar mor, dreist diraez ar bernioù-mor.

Dont a reas an dreizhidi a-benn d'en em dennañ diouzh melloù ar roued, o skoazellañ an eil egile. Ar baloñs, dilastret eus o fouez, a voe adaptet gant an avel, hag evel un evn gloazet hag a adkav un tamm buhez, e steuzias en egor.


Pemp treizhad, mui ur c'hi a oa bet er c'havell, hag ar baloñs a daolas pevar anezhe hepken war an aod.

An treizhad a vanke a oa bet diframmet evel-just gant an tarz-mor a oa o paouez skeiñ gant ar roued, ha gant se he doa gallet an aervag skañvaet sevel ur wech diwezhañ, hag, ur pennadig goude, tizhout an douar.

A-vec'h m'o doa lakaet ar beñseidi – gallout a reomp ober evel-se anezhe – o zreid war al leur ma huchent-holl, en ur soñjal en hini a vanke :

— O klask tapout an aod o neuñviñ emañ marteze !
Saveteomp anezhañ ! Saveteomp anezhañ !

Eil chabistr



Ne oa nag aerlestrourien a-vicher, na tud a vourre an ergerzhadennoù en aer, a oa bet skoet gant ar gorventenn war an aod-se. Prizonidi brezel e oant, bet bountet gant o herder da dec'hel e degouezhioù dreistordinal. Kant gwech o dije dleet mervel ! Kant gwech e tlejent bezañ bet skoet en islonk gant o baloñs diroget ! Un tonkad iskis a oa warne avat, ha d'an 20 a viz Meurzh, goude bezañ tec'het diouzh Richmond, sezizet gant bagadoù ar jeneral Ulysse Grant, seizh mil milmor e oant diouzh